

D'an 21 a viz Gwengolo

- War-dro ar bloaz a c'hras 71, moarvat en Etiopia pe c'hoazh e Hierapolis e Phrighia, merzherenti sant Mazhev, Abostol hag Avielour. Anvet e vez ivez Levi, mab Alfe. Bez' e oa ur publikan eus Kafarnaom hag e tilezas pep tra evit respont da c'halvadenn Jezuz ha mont d'E heul. Relegenn klopenn sant Mazhev, degaset eus Etiopia gant martoloded, a voe degemeret e Breizh gant ar roue sant Salaun Iañ (435) ha fiziet gantañ en iliz pennañ kêr Oksimor a voe anvet da c'houde Kastell-Paol. Diwezhatoc'h e voe miret en Abati Sant-Vazhev Penn-ar-bed.
- Er Iañ kantved, santez Iphigenia, gwerc'hez. Merc'h Egippus roue Etiopia e voe gonezet d'ar C'hrist a-drugarez da sant Vazhev hag en em ouestlas d'ar C'hrist evel manac'hez hag abadez ur gumuniezh ouzpenn daou c'hant maouez enni.
- En Ieil kantved, e Bocciano war ar Via Cassia nepell diouzh Roma, merzherenti sant Aleksandr. Diwaskañ e reas poan ar gazeg-goad hag an ivinennoù houarn a-raok bezañ dibennet. Sant Damaz a lakaas da zont e relegoù da Roma hag a savas ur bezskrivadur en enor dezhañ.
- En Ieil kantved, e Roma, merzherenti sant Pamphil, sebeliet war ar Via Salaria Vetus.
- E Breizh, er V vet kantved, sant Gatuod (Gg. Gatuode), eskob Gwened ha sant Mahouarn, penitiour er Porzhe e Kernev-Izel.
- C'hoazh e Breizh, er VIvet pe VIIvet kantved, sant Hervoed pe Rivoed, penitiour e Koad-ar-C'Helenneg e Merlieg e Bro-Gernev lec'h ma voe adsavet e chapel gant an tad Maner.
- E Breizh sant Riwalan, penitiour e Mëlrant e Bro-Gwened, en ur roc'h a-us war ribl ar Blañvezh.
- Er Vvet kantved, santez Mabin, gwerc'hez, merc'h Brec'han, a savas un iliz e Sant-Mabyn e Kernev-Veur.
- Er VIIvet kantved, sant Baglan Llanfaglen, abad, mab henañ daouzek bugel Dingad ab Nudd Hael, e hanternoz enez Vreizh (bro-Skos a hiziv). Desavet e Llancarfan, e voe da gentañ penitiour e Llanfaglen e-kichen Kêrnafon (Caernarfon) kent mont da Enlli lec'h ma voe abad.
- Er VIIvet kantved sant Landelin, manac'h iwerzhonat, penitiour ha kiminiad. Deuet da gentañ e Bro-Elsaz e treuzas ar Roen hag en em stalias e rannbarzh Fribourg in Brisgau. Goude un nebeud bloavezhioù e voe lazhet gant hemolc'her aotrou ar vro en doa kredet e oa eus an drougoberion a zizalbade ar vro. Dizoloet gant ur c'houer e voe sebeliet e manati Ettenhem nepell diouzh Baden.
- E 742, sant Saran, manac'h en Iwerzhon.
- Sant Edilhun, ur Saoz a zeuas da Iwerzhon da studiañ ha da bediñ.

D'an 22 a viz Gwengolo

- E 259, e Roma, ar santezed Emerita ha Digna. Div werc'hez yaouank e oant hag e varvjont o pediñ dirak o barnerion. O relegoù a zo bet miret en iliz Sant-Marsel war ar Via Ostia.
- War-dro 286, sant Maoris hag e geneiled, merzherion legion Tebez, en o zouez ar sent Exuper ha Candidus, lakaet d'ar marv. Hervez danevell sant Eucher e voent lakaet d'ar marv e Agaune, hiziv e kanton ar Valais e Bro-Suis, da vare an impalaer Maximilianus. War o bez e savas sant Sigismond un abati eus Urzh Sant-Eosten a vrudas kehelerezh ar verzherion.
- Sant Seglin, a vefe eus bagad kavandidi sant Maoris hag a vez kehelet evel patrom parrez Sant-Sewenn nepell diouzh Anast en eskobiezh Sant-Maloù.
- Er IVre kantved, sant Florant, beleg, diskibl sant Varzhin, penitiour er Mont-Glonne hiziv e Saint-Florent-Le-Vieil, e kember an Evr hag al Liger, war harzoù Breizh, mignon da sant Maurilius eskob Anjev. Bez' ez eo patrom iliz Plufur e Bro-Dreger e-lec'h ur sant-anver dianav ha kenbatrom iliz Lambezelleg a-gevret gant sant Laorañs.
- War-dro 565, sant Laod (Gl. Lô pe Laud), eskob Coutances ha Briovères (hiziv Saint-Lô) e Bro-C'hall. Hervez lod e vefe kembreat. Bez' en devoe ur perzh a-bouez e aozidigezh an Iliz gall.
- E Ratisbon e Bavaria, er VIIvet kantved, merzherenti sant Emeran, eskob a avielas ar vro a vefe ur Breizhad a orin. Abati Kleinelfdorf a voe savet war e vez.

- War-dro 670, distro da Zoue ene santez Salaberj, abadez Sant-Yann Laon. Pa oa bugel e voe benniget gant sant Euztaz Bobbio hag e adkavas ar gweled hag hi ganet dall. A-gevret gant he breur sant Bodon pe Leudin e herouezas ar vanac'helezh kolombanat.
- War enez Vreizh (Kembre), er VIvet kantved, sant Kadog, abad Llancarfan. Ganet e Kembre eus Gwenlev, roue Glywysing, ha Gwladys, e voe badezet gant ar penitiour Tarzhan e Caerwent hag e voe kenteliet gantañ betek e zaouzek bloaz. C'hoant gantañ en em ouestlañ da Zoue e krogas gant ar vuhez penitiour. Diskibled a zeuas davetañ hag e tiazezas manati Nantcarfan (Llancarfan) lec'h ma kelennas sant Gweltaz. Goude tri bloaz en Iwerzhon gant sant Carthag e tiazezas manati Llangadog Fawr e Kembre ha diwezhatoc'h hini Cambuslang e Bro-Skos. Gounit a reas sant Ildud d'ar vuhez manac'h. Mont a reas da birc'hirinañ da Roma ha da Jeruzalem. A-vec'h distro e rankas tec'hout rak ar vosenn velen hag en em dennañ ur pennadig en Arvorig. Distro da Nantcarfan en em dennas e Beneventum, nepell diouzh Northampton hag e voe dibabet da eskob. Eno e voe lazhet avat gant taol lañs ur Saoz.
- E Breizh, sant Urvan, penitiour.
- E 876, sant Elill, Iwerzhonad, manac'h en Angoulême e Bro-C'Hall.
- E 1820, ar bac'hiadez Paolina Pincson du Sel, leanez, genidik eus Roazhon, kar da Janed Pincson du Sel (an Itron du Houx), diazevouez leanezed Sant-Tomaz Villanova hag Itron Varia ar C'Hras.

D'an 23 a viz Gwengolo

- Er Iañ kantved, sant Zakaria ha santez Elesbed, kerent santel sant Yann Vadezour Diaraoger an Arloz. « Reizh e oant o-daou dirak Doue, eme sant Lukaz, hag e kerzhent direbech en holl c'hourc'hemennoù ha lezennoù an Aotrou. » (Lk 1,6) Beleg e oa Zakaria e-pad ma pleustre e wazoniezh en Templ ma teuas an ael Gabriel da gemenn dezhañ e c'hanfe Elizabed ar mab a c'hortozent abaoe ken pell amzer. O vezañ ma tiskouezas un tammduetañs en abeg d'e oad e kouezhas mut betek ganedigezh ar bugel. Diouzh he zu Elizabed a dridas gant al levezon pa lammas enni he c'hrouadur pa zeuas Mari d'o gweladenniñ ha pa ganas ar Magnificat. Pa zegemeras Elizabed he c'heniterv Mari e voe barret gant ar Spered Santel hag e kevarc'has gant kan ar Magnificat mamm an Arloz benniget dreist an holl wragez. Pa voe ganet o mab, Zakarias a lezas e levezon da darzhañ gant kan ar Benedictus, oc'h embann, karget gant Spered ar Brofeded, meuleudi an Doue salver hag o kemenn donedigezh ar C'hrist, an heol nevez deuet d'hon gweladenniñ.
- Er Iañ kantved, santez Tekla, gwerc'hez. Hervez levr Oberoù Paol ha Tekla e oa anezhi ur plac'h koant eus Ikonium a voe gonezet d'ar C'hrist gant an Abostol sant Paol. Flatret e voe d'ar gouarnour gant he mamm hag he c'hefriza dre m'he doa disklêriet dezho e felle dezhi chom gwerc'hez. Kondonaet d'ar geuneudeg e voe saveteet dre ragevezh Doue dre berzh ur arnevenn. Mont a reas da-heul sant Paol hag e teuas salv dre vurzhud eus heskinadurioù all. Meulet eo bet gant ar sent Jerom, Ambroaz, Yann Grizostomoz, Gregor Nikeia hag all.
- War-dro 76, e Roma, merzherenti sant Lin, pab. Warlerc'hier sant Pêr, e oa boas d'en em gavout gantañ e ti Pudens e Roma lec'h ma voe urzhiet gant Penn an Ebestel. Kas a reas sant Klaer davet an Arvorig.
- Er Vvet kantved, sant Konstañs, sakrist en iliz Sant-Stefan Ankon en Italia. Meulet eo bet evit birvidigezh e feiz gant sant Gregor Veur en e gKendivizoù. Un deiz ma rae diouer eoul kleuzeurioù an aoter en o leunias gant dour ha war e bedenn e tevjont evel boas a-hed an devezh.
- E 1968, en Italia, sant Pio a bPietrelcina, beleg kabusin e kouent San-Giovanni Rotondo e rannbarzh Puglia en Italia. A-hed e vuhez beleg e pleustras gwaziadezh an adunaniñ hag ar binijenn o sachañ miliadoù a benedourion a zeue bemdez da gofes ha da heuliañ an oferenn santel lidet gantañ o tougen en e gorf kleizennoù ar Basion. Kevrinour heverk e voe grataet dezhañ donezon ar daourevoud hag an diouganiñ. Lakaat a reas da sevel un ospital evit ar re baour, anvet Ti divec'h ar boan, anezhañ ur frouezhenn eus e vuhez roet evit salvidigezh ar bed.
- E hanternoz enez Vreizh (bro-Skos a hiziv), e 704, sant Adamnan, abad enez Iona. Ganet eo e 624 e skrivas buhez sant Koulmkell, Vita sancti Columbae, hag ul levr a-zivout an Douar Santel De locis Sanctis. Bras e voe e levezon war gevredigezh e amzer.

- En Iwerzhon, santez Comhat, maouez santel.

D'ar 24 a viz Gwengolo

- En Ieil kantved, distro da Zoue ene sant Anatol pe Anathlon, kentañ eskob Milano. Kaset e voe gant sant Barnabaz, keneil sant Paol, da avielañ rannbarzh Milano ha Brescia lec'h ma varvas.
- E 685, sant Germer, abad Fly, eskob Beauvais, a voe da gentañ abad Pental, manati savet gant sant Samzun.
- E 1047, sant Izarn, abad Sant-Viktor Marsilha, mignon sant Odilon Cluny. Aesaat a reas astenn ar vanac'helezh e Provañs hag e Katalonia.
- E 1047, merzherenti sant Jerard Sagredo, eskob Csanad en Hungaria. Manac'h beneadat eus Venezia e teuas da vezañ eskob war c'houlenn ar roue Stevan Hungaria hag e voe merzheriet gant paganiz.
- E 1938, sant Silouan, manac'h e Menez Atoz. Kalvez e oa Symeon Ivanovitch Antonov e kreiz Rusia, anezhañ un den kreñv ha riotus, pa voe galvet d'e c'hwec'h bloaz war 'n ugent gant ar Werc'hez Vari da zistreiñ davetañ e-unan. Deuet da vezañ breur Silouan er Menez Atoz e tiwaskas kalz poanioù diabarzh o stourm a-enep al lorc'hentez. Goude bezañ klevet an Arloz o lavarout dezhañ « Dalc'h da ene en ifern ha chom hep dic'hoanagiñ », e vevas er guñvded hag en erbederezh diastal evit ar bed a-bezh o skignañ ar peoc'h tro-dro dezhañ.
- E Bro-Saoz, gouel Itron-Varia Walsingham goude emziskouezadenn ar Werc'hez e 1061.
- E Breizh, sant Maogad, abad Sant-Meven, sant-anver parrez Pluvaelgad Bro-Boudouvr-an-Argoad.
- Er Vvet kantved, sant Donnan, , abad, beleg, diskibl sant Brieg, kenderv sant Fragan, a savas ur manati war ribl ar Goued nepell diouzh Ploufragan, hiziv parrez Sant-Donan.
- En Iwerzhon: sant Kulgi (Iw. Caolchú), manac'h ha sant Kellegan (Iw. Ceallachán), manac'h.

D'ar 25 a viz Gwengolo

- Er Iañ kantved, sant Kleofaz, diskibl an Arloz. Goude Diouzañv Jezuz, edo o kerzhout gant un diskibl all war hent Emmaus p'en em gavas ar Salver ganto ha pa zisplegas dezho ar Skriturioù. Tomm e oa e galon ouzh e glevout koulskoude ne voe anavezet ganto nemet pa rannas ar bara ha neuze e steuzias kuit.
- E 303, sant Pafnus Meur, penitiour en Egipt. Da vare heskinadegoù Diocletianus e voe paket ha kondaonet da vezañ kroastaget ouzh ur balmezenn goude bezañ diwasket boureviadur ar rod a zrailhas e holl eskern. Meur a hini eus ar re a welas e verzherenti a voe gonezet d'ar feiz ha merzheriet d'e heul.
- E 303, en Amiens e Gallia, merzherenti sant Firmin (Lt. Firminius), beleg. Mab Firmus, penn lu roman Pompaelo (Pampeluna), e voe kanttroet gant sant Saturnin Tolosa o tremen dre Navarra hag ez eas d'e heul. Deuet da vezañ beleg e voe eskobet hag e avielas Bro-Akwitania, Bro-Arvern, Bro-Beauvais hag Amiens lec'h ma voe lazhet eno war urzh ar gouarnour Sebastianus. En e enor e vez dalc'het gouelioù meur bep bloaz e Pampeluna etre ar 6 hag ar 14 a viz Gouere.
- Er Vvet kantved, sant Principius, eskob Soissons, mab santez Selina, breur sant Remi eskob Reims e Bro-C'Hall. Kenskrivañ a reas gant sant Sidoan Apolliner hag e voe ivez kuzulier santez Klotilda.
- E 1392, sant Serj a Radonez, abad, diazezour abati brudet an Dreinded Santel, nepell diouzh Moskov. Da gentañ penitiour e koadegoù gouez e krogas da bleustriñ ar vuhez senobitek a skignas. Diuzet da higoumen e voe un den leun a guñvder, kuzulier ar briñsed ha frealer ar feizidi.
- E 1855, ar gwenvidig Giovanni Mazzucconi, beleg italian, merzher en Papouasia-Ginea-Nevez d'e nav bloaz war'n ugent.
- E Bro-Suis, sant Nikolaz Flüe, lidet d'an 21 a viz Meurzh.
- E Breizh, e 529, sant Seni pe Sezni, eskob-abad en Iwerzhon hag e Breizh. Ganet eo e 402 en Ulster. Goude e studioù en em dennas war un enezenn anvet Clarae. D'e 23 bloaz ez eas da Roma

evit studiañ ar Skriturioù Santel. Eno e kejas gant sant Padrig e ginnigas d'ar pab Selestin Iañ o eskobas o daou hag o c'hasas da aviañ Iwerzhon. Seni a ziazezas ur manati a zeuas da vezañ ken brudet ma voe lakaet da renk eskobiezh gant ar pab Sikst III. Sevel a reas un eil manati a voe ur skol evit stummañ beleion. Kuitaat e reas Iwerzhon e 477 gant dek diskibl ha tri-ugent hag e tilestras Poulluhenn war aod Kerlouan e Bro-Leon. Bevañ a reas evel penitiour a-raok mont da ziazezañ ur manati lec'h m'emañ hiziv Gwiseni, eno e varvas d'e 127 bloaz. Ul lestraz a Iwerzhoniz a zeuas da gerc'hat e relegoù, nemet ur vrec'h.

- War-dro 533, sant Solen (Lt Solemnis, Solennis, Gl. Souleine), eskob Chartrez, Iwerzhonad, kuzulier Klodwig Iañ a Vro-C'Hall, mignon sant Remi ha sant Vaast.

- En Iwerzhon, e 610 e Cloyne, sant Fionnbharr (Finnbar, Gwennvarr, Barr pe Barra), eskob kentañ Corcaigh. Diazezañ a reas abati Etargehael hag e voe brudet evit e gelennadurezh hag e santelezh.

- En Iwerzhon, e 623, sant Loc'han, manac'h e Corgaigh.

- War enez Von, er V vet kantved, sant Karan, abad e Tragaian.

D'ar 26 a viz Gwengolo

- E tro dibenn an trede kantved e Kyrros (Cyrrhus) e Siria, merzherenti ar sent Kosma ha Damian, daou vreur a orin eus Arabia e oant, anezho mezeion anarjir da lavarout eo e prederient an dud evit netra. Meneget e vezpnt er C'hanon Roman. E Breizh e vezont kehelet ivez hag e meur a lec'h e weler Kosma, ar mezeg, gant e lestr-troazh, ha Damian, al liaer, gant e bod traet.

- E 304, en Antiokeia e Nikomedia, merzherenti sant Kiprian ha santez Justina. Un den yaouank dêvet gant angerzh e garantez evit Justina, ur werc'hez kristen yaouank, a zeuas da c'houlenn ouzha Kiprian, hudour brudet he lakaat plegañ dezhañ dre achanterezh ha breoù. Ar spered hud aspedet a ziogetas avat d'ar c'hilher ne c'helle netra enep gwir ziskibled ar C'Hrist. Diwar-se e voe gounezet Kiprian d'ar feiz hag e kemmas buhez. Da geñver heskinadeg Decius e voe harzet a-gevret gant Justina. Ha goude bezañ bet skoet ha bazhataet evit klask en aner o lakaat da zinac'hañ o feiz e voent dibennet o-daou. O c'horfoù a chomas c'hwec'h devezh hep beziadur betek bezañ sammet gant martoloded o c'hasas da Roma lec'h ma voent seblat e-kichen chapel-vadez al Laterano.

- E 1005, sant Nil a Rossano, abad, diazezeur abati Grottaferrata. Ganet e Calabria en un tiegezh gresian, e oa un amaezhiad uhel pa voe gounezet d'ar feiz goude marv e wreg hag he merc'h. Da gentañ penitiour e Calabria hag e Campania e tiazegas ur manati gant reolenn sant Bazil war maezioù Tusculum nepell diouzh Roma lec'h ma varvas d'an oad a dek vloaz ha pevar ugent.

- E 1885, e Lyon, santez Tereza Couderc, diazezeur leanezed Itron Varia ar Gambr-Uhel. Meur a wezh e voe tennet dezhi he c'harg a superioez hag e asantas ar santez-mañ ren neuze ur vuhez uhel ha kuzhet.

- War enez Vreizh, er Vvet kantved, sant Maogan, abad e kreizteiz Bro-Gembre a hiziv, kenlabourer sant Kado ha sant Brieg.

- Er VIvet pe VIIvet kantved, sant Koulman, abad Lann-Elo en Iwerzhon, abostolour e hanternoz enez Vreizh (Bro-Skos).

- Dedi brientiliz Santez-Anna-Gwened ha penn-bloaz kurunennidigezh delwenn Santez-Anna-Gwened d'an 30 Gwengolo 1868.

D'ar 27 a viz Gwengolo

- Er Iañ kantved, sant Marc, feizvonnour, anvet ivez Yann en Oberoù an Ebestel. Lidet gant ilizoù ar Reter a-ziforc'hañ diouzh sant Mark an Avielour ha sellet evel eskob Biblos.

- Sant Aristark, diskibl sant Paol (kv. Kol. 4,10) ha sant Zenon ar gwiraour (Tt. 3,13).

- E 304, e Roma, da vare Diocletianus, merzherenti sant Kallistrad hag e geneiled. Genidik eus Kartaga, e oa soudard pa voe diskuliet e oa ur c'hristen anezhañ. Staget en ur sac'h e voe taolet er mor hogen e voe roget ar sac'h dre vurzhud hag e voe savetaet Kallistrad gant daou zelfin. O welout ar marzh e voe gonezet nav soudard ha daou ugent a voe drouklazhet a-gevret gantañ.

- E 1660 e Pariz, sant Visant a Baol, beleg, diazezour Beleion ar Mision, anvet ivez Lazaristed, ha kendiazezour Merc'hed ar Garitez gant santez Louise de Marillac. Amparet eo bet gant ar pab Leon XIII Paeron neñvel an holl oberennoù a garitez.
- E Breizh-Veur, er Vvet kantved, sant Gwalez ha sant Barrug, menec'h, diskibled sant Kado.
- E Breizh, IXvet kantved, sant Ourhan, penitiour e Breizh.
- En Iwerzhon, er VIvet kantved, santez Lupid (Gg. Lupite), unan eus c'hoarezed sant Padrig.

